



Rummad « Reiñ liv d'e vrezhoneg »

1. Pal ar rummad

Deskiñ penaos reiñ liv d'e vrezhoneg, dre studiiñ don enrolladennoù get ur brezhonegour pe vrezhonegerion « dave ».

2. Piv a c'hell lakaat e anv ?

Brezhonegerion en o bleud get ar yezh ha get c'hoant da wrizienniñ o farlant en ur c'hornad bennak.

3. Petra 'vo graet ?

Goude ma vo bet displeget penaos e c'heller labourad evit studiiñ don ur parlant ha get pesort benvegoù, e vo da beb unan da labourat àr an danvez degaset getoñ e-unan.

Desket e vo :

- penaos klask skoazell evit monet da welet ar vrezhonegerion a-vihan ;
- penaos enrolliñ ar c'haozioù gete ;
- penaos studiiñ an enrolladennoù : fonetik ha fonologiezh, meziantoù hag a c'hell aesaat ar labour ;
- e-menn klask reskontoù pe keñveriiñ get mammannoù arall.

Graet e vo :

- klask stummoù ag ar parlant studiet ;
- treuzskrieviñ un nebeud munutennoù enrollet ;
- pleustriñ da lâret en-dro èl en tamm enrolladenn-se.

Sikouret e vehet get kelennerion dishañval doc'h ar parlant studiet. Evit o c'hask ha gellet goulenn gete donet etre ar Merc'her d'enderv hag ar Gwener, skrivit da zDavid ar Rouz (trodistro@free.fr) an abretañ ar gwellañ evit lâret pezh parlant a faot deoc'h studiiñ.

4. Degasit ganeoc'h...

5. Danvez da labourat àrnoñ

- Enrolladennoù (unan da vihanañ) graet get tud ag ar vro a faot deoc'h studiiñ he farlant, pe geneoc'h, pe get tud arall, pe get ur radio
- Sonennoù, liv ar rannyezh-se àrne
- Testennoù er rannyezh-se ivez
- Geriadur(ioù) ha skridoù arall àr ar rannyezh dibabet

6. Dafar

- Urzhiataer hezoug get ar lennerion rekiz evit lenn an enrolladennoù degaset (lennour pladennoù mard eo an enrolladenn àr ur bladenn, VLC pe meziant arall)
- Un tokarn pe selaouelloù
- Ur mikro (àr an urzhiataer) pe, gwell, ur sonenrollour a-feson